

CHANSON NEVEZ

VAR SUJET DAOU ZEN YACUANC PERE EN EM GARE GANT FIDELITE

Voar eun ton nevez.

A Beillard, Horaç, Tibul, Catul, Ovid, Orphe, Choui, modelou sincer deus ar guir amitie, Laqit oll em guenou ho proposiou charmant, Inspirit em speret va c'halon languissant. Me ya da zisclerya va buez maleurus : Tostaît d'e c'hlêvet, tud yaouanc curius; Deut oll da hartaji va glac'h, va c'hlêmou, Ha formit ganin-me ur feunteun a zaelou. En escopti Treguer e voa eur plac'h charmant, Hac e doa ravisset calon meur a zen yaouanc : Demeus an oll merc'het a meus darempredet, Hy eo dre breferanç dreist-oll a meus caret. Mes he sellou quen douç hac he c'homzou deread, He furnes, he dousder hac e bolontez vad Alumas em c'halon flammou an amouroustet, Bep instant va speret voa ganti occupet. Var sovennou yaouanc, gant beg eur ganivet, Trc-var-dro hon hano lies am eus scrivet; C'houi, plantenno eurus, a gresco nos ha de ; Ni garfe eveldoc'h e cresqfe hon amitie. Ne meus mui a blijadur : nemet aru e vez En deiz d'allout guelet objet va c'harantez : Ennan ma residanç desir va fantazi, A guement zo 'r bed-man ne garan nemet-hi. Mes, allas ! forçet eo chaden ar blijadur ; Troet va flaneden en flammou dinatur : Breman, a dra certen, vezo ret e c'huitat ! Mancout a ra va c'halon, sclerder d'am daoulagad. Doue oll buissant; roit din assistanç, Vit m'allin d'am mestres mont d'annonç ar setanç : Me a ya c'hoas eur vech bete ty va mestres, Gant eur galon carguet ; leun a distridigues. Cetu me vis-a-vis d'am guir maya caret, Princes an amitie, model an oll merc'het, Va oll gontantamant, oll joa eus va speret, N'allan quet comz outi, quement e zon mantrat. Neus netra endro din na repet d'am memor : An amitie fidel a zo dreist peb sort tenzor, Mes breman e redoubl oll glac'h va speret, N'allan quet comz outi, quement e zon mantrat. Abondanç va daelou a deu d'am daoulagat ; Carguet eo va c'halon derneus huanad. Petra zo, va mignon, ma zoc'h qen desolet ? Deus hoc'h affliction contit din ar sujet. Queun meus a greis calon o velet ho tourmant, Me garfe ve 'm pouvoar rei dec'h soulajamant. D'ain annui, d'am glac'h, c'huia zo calz qiriec ; Abars varc'hoas vintin me a vo partiet. Possubl ve, va Doue, e ve guir quement-se, E vec'h-u deut aman vit qemer hon conge ! N'en deo nemet re vouir ; partia a vo ret : Arru eo va c'herent da brononç va arret. Arca, va servicher, e zit-la d'am c'huitat ! Penau a rin breman ? Houman zo calonad ! Va oll santimanchou zo ganec'h gonezet ; Me a vo malhurus, ma vemp dispartiet.

Arretit ho taelou, n'en em desolit qet ; Bars eur mis, d'ar pella, me zeui c'hoas d'ho quelet, Qemerit confianç ha chomit en ho peoc'h ; C'huia eo va esperanç : na garan nemedoc'h. Allas ! ma servicher, n'en deo qet hep reson E velet ho mestres e quer bras affliction : P'o po chenchet a vro, c'huia chencho a lesen ; Eur vestres all o po, c'huia 'm dileso a gren. Ha pa ve laqaet entrezomp-ni hon daou Qement demeus a hent vel zo ac'han d'an envou, Credit en assuranç biquen n'o tlezan : Biqen mestres n'aïn bo met an hini breman. Birviquen n'ancouezan ar pez a zo touet, C'houi c'heus sonj, va mestrez, a voueliou Nedelec ; En boa aon em tilesjac'h en deiz oa o touet An hini na zezire nemet beza ho pried. Ha neuze, va mestres, evit va c'honsoli, Gant eun aer qen constant teujoc'h da bropos din Monet d'an ilis vras, eno dirac Doue, Da brononç ar sermant deus ar fidelite. Etre peder ha pemb heur, ar meurs dahardae, En em rentjomp en ilis an eil gant eguile, Ha pa oamp daoulinet vis-a-vis d'an auter, E lequejoc'h bo torn en hini ho servicher. Gant eur galon sincer, e faç ar Sacramant, E teujomp-ni hon daou da brononç ar sermant D'en em garout fidel bete fin hor bue, Biqen nemet ar maro zur hon zispartige. Ha p'am be da vevan quen liez a vlaves Evel a zo a zelien ebars en eur foires, Birviquen n'ancouean va dousic Jan-Yvon, Pladjadur va speret, rouanez va c'halon. Deus a greis va ene, me offr dec'h, va mestres, Sacrifiç va speret ha va goad assambles : Mar trahissan biqen va oll bromesseou, Doue d'am punisso a bep seurt malheuriou. Qemerit, va mestres, vit merq a bromesse Diou galon peur dreujet gant ar memes cleve : Var ar memes imach e cavot dessinet Diou durzunel yaouanq en em guere parfet. Ho comzou, va mignon, a zoulach va c'halon ; Na ellan quet credin em lesfec'h en abandon ; Assurit din c'hoas, var ho quir a henor, Biqen na drahissot eur galon dec'h digor. Finissomp, va mignon, tots eo d'an anter-nös, Arru eo an amzer, poent eo deomp repos. Adien, va mestres quer, quen a vo ar c'henstan, II dec'h, va servijer, mes retornit buan. Aben penizec de goude e returnis d'he quelet Gant calz demeus a joa ne zanten quet querzett. N'en d'en quet buan avoalac'h, m'am boa c'hoant, Me zante e lampe va c'halon triomphant. Pa voan aru er plaç en desir ma bolante, E quichen va mestres evit clevet he doare, P'e c'honsideris erfat e choumis estonet, O tonet da compren penaüs e oa chenchet.

Evit parlant dezi, hi na responte qet ;
 Eur flem sco em c'halon pe guelis qer mantret.
 An douar aroset gant daelou he daoulagad
 A voa eun test assuret demeus he c'halonad.
 Ah ! m'am c'herit-u c'hoas gant guir fidelite
 Discleuit etrezemp breman ar virione ;
 Lerit din ar sujet deut ho melanconi ;
 Well eo ganen mervel eguet rei dec'h anvi.
 Allas ! va servicher, ni a vo separat :
 Da zemezi d'eun all me a zo contraignet ;
 Henvoas zo lavaret e vijen goulenet :
 Se a zo qiriec din ma zon quen glac'haret.
 C'hui, Mari, va mestrez, am lez en abandon,
 Goude o peza lajet rouanez em c'halon !
 Hounes eo ar recompaç e meus-me merit
 Goude o peza caret re dreist an oll merc'hiet.
 Me ho ped, va mignon, na reprochit quet din
 E ve va dessin breman dont d'oc'h abandonni.
 Possuhl ve em acusfac'h a infidelite !
 Ne meus dicuelet d'ec'h nemet re garante.
 Gout ousoc'h, couls a me, p'guement o caran ;
 C'hui zo cauz d'an tourmant pinin a anduran :
 Va oll garantez voa gonezet oll ganec'h ;
 Va brassa plijadur voa obeissa dec'h.
 Bepret en n'em remet, gant guir fidelite,
 Bars en andret fixet herves ho polonte.
 N'am mije, eveldoc'h, neubeutoc'h carante,
 N'em bije ho cuited hep nep difficulte.
 Me garge na vigem biquen en em velet,
 Pa zeo ret Demp hon daou beza dispartiet ;
 Ma vije aru ar poent da veza demezet,
 Credit penaus bijen d'am zad n'am bije pleguet.
 Goude ar blijadur teu an desolation :
 N'ouffac'h mui evidon caout seurt affliction
 Eguet d'am separi deus desir va c'halon ;
 C'hui voa, ma servicher, va oll gonsolation.
 Ebars em flanedan, o pebes chenchamant !
 Homan a zo evidon eur voalen a dourment !
 Va amzer dremenet am chagrin, va mestres :
 Pa deu din da gomprem bars em flijadures.
 Sonch oc'h eus a vis ebrel, ar zul goude creis-de
 E rojoc'h din ar gaj demeus hoc'h amitie :
 Nan, biscoas ma speret na oa bet quen joaus ;
 Hanval voa hon boneur d'ar sperejou eurus.
 Mes breman è mantret gant an oll dourmanchou,
 Me grede parset mad e vijemp priejou :
 Eun esperanç quen dous rejouisse va c'halon ;
 Me zourje na vije biquen separation.
 Mes achu e va boneur hac achu evit bijen,
 N'en em zissipo quet evel ma ra r'c'hisen,
 A zisparis en aer pa deu an eol da sevel,
 Pe vel eun dornat pel guentet gant an avel.
 Petra a zervich din beza lajet er bed-man ?
 Bea da zoussfr evidoc'h, o va mestres ! breman,
 Qen hir a va buez e padou va glac'haret,
 Me garre beza brema e calon an douar !
 Adieu e laran dec'h qent eguet partia,
 Me a barlant ouzoch vit ar vech diveza :
 Bijen bars ar vro-man n'ho quelan, va mestres :
 Bet eurussoc'h evidon... Adieu evit james.
 M'ho ped, ma servijer, ouzin na fachit qet :
 Pa golcen va buez, me n'oc'h ancoain qet.
 Birviqen n'o quelin hep monet d'hc petec ;
 Gant cals a gonfians deut bepret d'am quelet.

Bet persuadet mad ho po consolation ;
 C'houi e am eus choaset vit pried d'am c'halon.
 Credit en assuranc, biquen n'o tilezan ;
 James mestres m'am bo met a hini breman.
 Ar silanc, ar glac'haret, ra fin d'or preposiou,
 Hor mouez a voa mouget gant an huanadou ;
 Demeus va daoulagad a rede an daelou
 Vel ar voasiou a tiruill demeus ar montagnou.
 N'ouffac'h biquen sonjal qer bras desolation :
 Me sonje voa plantet eur c'heuve em c'halon ;
 Carguet a zizesper, na c'houlen nemet ar c'hraç
 Ar maro ar prompta, an termen va disgrac.
 Me voa het pemzec dez, ia, ha pemzec nos
 Hep me ellis biscoas qemer euu tam repos :
 Pa vijen em goele en dessin da gousquet,
 Gant ar spont hag ar form e vijen difunet.
 Bepret ar memes uvre a deue incontinent
 Da represantin din an objet eus va zourmant
 En etat m'e guelis, pa bartijomp hon daou,
 Ar flem, an disesper bars en hor c'halonou.
 Lies e receven deus he c'helou goude,
 Dre voyen liserou carguet a garante,
 Pere am c'honsolle epad va hir absanç,
 O tont da jouissa deus joa an esperanç.
 Cetu deja nao mis na meus quelet ma mestres :
 Arru eo ganin liser digant he c'honsortes.
 O pebeus gelou trist zo ebars annonçet !
 A dall al lignen guenta e meus en remerçet.
 O planeden barbar, leun a velanconi,
 Ne scuiset-u qet c'hoas ous ma fersecurti !
 Pet quech e varvin-me qent mervel en effet ?
 E prouvi ho coler, o potra meus-me groet !
 Den ingrat ha perfid, caled ha dinatur,
 Maro eo da vestres bars en displijadur !
 N'ellis pelloc'h poursu ar c'helou desolant,
 Coll a ris ar quelet, an ners, ar santimant.
 O Roue an envou, mestr an oll Aezel eurus,
 N'oc'h eus qet ma c'houet evit beza malhurus.
 Disquennet bete din sell lagad a druez,
 Pe lajut promptamant eun termen d'am buez.
 Ar spaç a drizoc mis oun bet ous he c'henti,
 Ne voan eni plijadur nemet pa vijen ganti :
 Hi a voa an objet eus va ambition ;
 Qen ne allan cavet nemet affliction.
 C'hoas e viran em pres he liser diveza
 A scrifas hi din-me qent quitat ar bed-ma,
 Ha pa ven va unan lies en digoran :
 Pa gommançan d'e lenn, gant daelou en glebian.
 Gouelomp oll, tud yaouanq, gouelomp oll assemblés !
 Biscoas plac'h na zeus bet fideloc'h eguet honnes,
 Birviqen na sortio certen eus va speret ;
 Bete fin va buez me e c'haro bepret.
 Canit-u, rossignol, gant ho mouez triumphant,
 Disquezit d'ar c'hoajou hano ma mestres coant ;
 D'ar mintin, pa bignit etrezeg an envo,
 Vigilant ha fidel, repetit he hano.
 Trist e quichen he bez e lacan va c'harante ;
 Ennan e repos breman objet va amitie.
 Doue vit recompans deus he c'harante fidel,
 En deus accordet dei ar joayou eternel.
 Ha pa deuyo an ancou gant e faç horrerus
 Da lacat enn termen d'am buez maleurus,
 Deus ar mèmes momet ma yo va guad o repos
 Me jouisso ganti eus joa ar barados.